


BUGALE AR SKOL



I

Ni a zo potredigou, (1)
 Kaset d'ar Skol gristen (bis)
 Da zeski 'n holl skianchou,
 Ar furnez, ar bedenn.

DISKAN

Ni 'ya en dro
Dizoursi bras ha dinec'h { bis
Atô !

II

Abredig diouz ar mintin,
 Da zeiz eur pe war-dro (bis)
 Vez klevet mammi pe dintin :
 « Allo ! Yannig, (1) war zao ! »

III

Kerkent bag en eur roc'hat
 E savomp a ruilhou; (bis)
 Buau 'wiskomp hon dilhad,
 E walc'homp hor ginou.

IV

Laret bep a baterig
 Hag eur pennad Ave (bis)
 E lonkomp eur zoubennig
 Pe eur banne kafe

V

Neuze, dre bep seurt amzer,
 Pa viche dour-bilh-c'hlaou, (bis)
 'Laromp kennavo d'ar ger,
 Krog er baner, ha yao ! »

VI

Er goany, pa vez ar yenna,
 Ha rus penn ar friou (bis)
 Ne jomomp ket da dorta
 Hed-a-hed an hentchou.

VII

Goulskoude hiniennou
A garfe chom war-lerc'h (bis)
D'en em ganna gant boulou,
D'ober eur potr-koz erc'h.

VIII

En hany, pa vez tom an heol,
'Lec'h deski kenteliou, (bis)
E karfemp chom gant an holl
Da droi foen ar praou.

IX

Eur bern traou 'vez da zeski
Da bemdez ha da zul : (bis)
Katekiz, géographi'
Histoir', Scienç' ha Calcul

X

Er Skol morse n'echaner :
« Yann, ⁽¹⁾ labourat a ri ? » (bis)
Aliez n' vez ket amzer
Da c'houeza mad ar fri.

XI

« Yann, lavar da genteliou ;
Diwall na quezfez ket ! » (bis)
Dicté', dessin, problemou...
Na weler fin ebet.

XII

Va Doue, pebez micher
Evit hor mistri keiz ! (bis)
Keleññ hor sperejou berr
Kreiz an trouz' pad an deiz !

XIII

Dre c'hras Doue 'r vakansou
'Zo digor dirazomp : (bis)
D'ar Skol ha d'ar c'heneliou
Kennavo a laromp !

(1) Evit ar merc'hed : merc'hedigou, Channig, Chann.